



Merer-ez war ar goprou

Kinnig labour embannet d'an / ar jeudi 11 septembre 2025

Lec'h : **Landerne**

Doare post **CDD** H/F

Padelezh

Kerkent ha posubl

Deskrivadur ar post-labour

Emañ ar rouedad Diwan o klask ur v-merour-ez goprou a savo fichennoù gopr ar c'hopridi o labourat e skolioù, skolajoù, liseoù Aodoù an Arvor, Il-ha-Gwilen ha Liger Atlantel (100/150 fichenn c'hopr).

Dindan atebegzh ar benngontourez e labourit ivez gant an den e karg eus ar c'hoskor, ar bennsekretourez ha sekretourez pedagogiezh an eil derez karget da zastum an titouroù war ar goprou. Ebarzhet penn-da-benn e mererezh ar c'hoskor e vo fiziet ennoc'h ivez heuliañ red micherel ar c'hopridi.

Ho kefridioù a vo dreist-holl :

Bizskrivañ roadennoù ar goprou war gemm, kontrollañ ha gwiriañ ar fichennoù gopr
Sevel, kontrollañ, diskleriañ an DSN miziek ha darvoudoù
Sevel an teulioù fin kevrat
Heuliañ an emzeladurioù/diemzeladurioù d'ar gwarez yec'hed
Sevel testenioù fin goprou a denn d'an ezvañsoù (kleñved, mammelezh, ehan labour)
Sevel teulioù digoll ragevezh evit gopridi ar gevredigezh ha mistri kevratet gopret gant ar Stad
Bezañ e darempred gant an aozadurioù sokial hag ensavadurioù all a denn d'ar goprou
Respont da c'houlennoù ar c'hopridi diwar-benn ar goprou
Sevel red micherel gopridi nevez enfrede.
Bremakeaat ar redoù micherel diouzh emdroadurioù kaeloù ar goprou
Respont da c'houlennoù ar c'hopridi diwar-benn o red micherel
Skoazellañ ha/pe gervel ur pourchaser pa rank bezañ bremanekaet ar meziant goprou
Kemer perzh er preder war raktresoù a denn da mont en-dro ar servij ha da kudennadoù goprou
Bezañ den-dave evit raktresoù a sell ouzh diorren ar rouedad

Ouzhpenn goprou Diwan e vo ennoc'h ivez sevel goprou un nebeut kevredigezhioù a ver ar skolioù (KDP, Kevredigezh Desevel Publik), etre 10 ha 30 fichenn gopr ouzhpenn. Ar fichennoù gopr-mañ a vez savet gant ar poellad AGATE hag e voc'h stummet evit mestroniañ anezhañ. Diouzh ho profil hag ho c'hoant e c'hellfe bezañ fiziet ennoc'h diorren ar servij goprou-mañ.

Skiant-prenet ha barregzhioù goulennet

Bet tapet ganeoc'h ur stummadur kontouriezh BTS/DUT/Aotreegezh dibab koskor, pe ur stummadur mererezh koskor/goprou, ho peus ur skiant-prenañ 5 bloaz d'an nebeutañ e mererezh ar goprou.

Emren ha plijet gant al labour a-stroll ez oc'h strizh war al labour, aes gant an dud ha gouest d'en em azasaat buan ouzh un endro labour nevez.

Anavezout ar meziant « Sage Paie » a vefe deuet mat. Mestroniañ word hag excel (dreist holl excel) a zo pouezus ivez evit ar post-mañ.

Ul live mat e brezhoneg a rankit kaout ivez (B2 pe C1 tapet en DCL) pe diskouez ur gwir youl da zeskiñ brezhoneg.

Titouroù all :

Doare kevrat : Kevrat didermen
Amzer labour : Leun amzer 35^e dre sizhun
Deiziad kregiñ : Kerkent ha posubl
Gopr : Diouzh ho skiant prenet
Lec'h labour : Sez ar gevredigezh, e Landerne

Evel gopr-d-ez ar gevredigezh ho peus droad da gaout ur c'henwarez, ur ragevezh ha 6 sizhun koñjeoù paeet.

Ma'z oc'h dedennet gant ar post, trugarez da gas ho emstrivadur (CV + lizher emginnig) da tuta@diwan.bzh.

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://www.diwan.bzh/br/offres-emplois/gestionnaire-paie-120920252233>